

Festival ar Vuhez, war hent Plabenneg



Staff MKK a blij dezho pourmen tro-dro d'ar panelloù pa vez brav an amzer.

Gwelet ho peus marteze strolladoùigou tud o c'hoari biz-meud war an hent, o tibradañ panelloù « F2TL » ? Normal eo ! Kroget eo an dud da vont war-zu Plabenneg, e lec'h ma vo dalc'het ar gouel bras, d'an 31 ha 32 a viz Eost e Kerilleo. N'eo ket toud gouzout an deziad, bremañ e fell deomp gouzout hiroc'h war ar festival divoutin-se. Lakait ho sac'h war ho kein hag heulit ar panelloù !

Un anv tort

'Baoe 4 bloaz vez ur strollad tud yaouank a bPlabenneg oc'h aozañ ur sapre gouel: « Festival ar Vuhez ». Perak un anv ken tort ? « Buhez pep den a zo pouezhus evit krouiñ aergelc'h ar gouel » a zikler Perynn, plac'h he blev ruz. Met penaos e c'heller lidañ un dra ken ledan hag ar vuez ? « En ur tchekiñ 'nezhi ! 'Vel just » a respont Mael, paotr e vousec'hoarz hegarat. Ne c'heller ket klask kompren pep tra gant ar ganfarded-mañ, zoken o geriaoueg zo digomprenus !

Deomp bremañ da welet Virgile, ur paotr ken ruz e vlev ma vez

diaes din sellet eeun outañ.

« Setu aze al leurenn a vo implijet 'pad ar gouel » emezañ. Ur garigell vras, savet liennoù e pep korn anezhi ha mat pell zo ! « Ul leurenn digor eo, digor d'an holl re a fell dezho seniñ pe lakaat da selaou o mouezh flour. ». Hervez ar pezh 'vez klevet e Kerilleo, e vo tro da glevet strolladoù Rock, Reggae, Funk pe c'hoazh hengounel a-hed an dibenn-sizhun.

Degasit ho padj

Un tamm pelloc'h war letonenn Kerilleo e kavecr Bleuenn, ur plac'h ampart war an aozadurioù a-bep seurt, eus al lotoioù betek ar gouelioù evel hini ar Vuhez. « Ar pal zo lakaat an dud da gemer perzh » eme an dimezell. « Fardañ ar vastrouilh, ar c'hrapouez, kas war raok an davarn, staliañ an teltennoù bras ... Dezho da verañ ! ». Peadra d'ober neuze evit festivalourien o Buhez ! Vastrouilh, h, bier ... Un dudi 'vit ul lip-e-bav. Profet ouzhpenn ?!! Un dudi evit ul leonad ! Gwenole, paotr bras e skouarnioù blevek, o

tont davedomp : « Deuet eo ho padj ganeoc'h ? ». « Perak 'ta ? » emezomp. « Evit kaout ho padj « frekañs » eo dav deoc'h diskouezh ho padjoù kozh ! ». Ambon ! Ur c'heloù a zoare !

Sportoù ha c'hoarioù a bep seurt

Ar c'hoarierien a bep seurt ne vint ket dipitet e gouel ar vuhez. Ar « JoZo » mod Plabenneg a vo digoret d'ar sadorn goude merenn. Un deltenn a vo gouestlet d'ar c'hoarioù : kartoù, dominoioù, Mario kart super circuit ... « Ar c'hoarioù zo pouezhus evit krouiñ liammoù etre an dud e-pad ar gouel » eme Virgile, kabiten ar skipailh MKK evit ar JoZo. Ur bern traoù a vo neuze an dibenn-sizhun-mañ e Plabenneg evit pempved Festival ar Vuhez !

Digwener :

- Kemerit ho padj (meur a hini a zo, hervezh kriterioù liesseurt)
- Plantit ho teltenn
- Kit da rostañ ho revr e-kichen tantad Sant-Yann-ar-bizied-tort
- Drebit / fardit ho krampouezh
- Evit bier ar vro (Melen bio Korev ha Goularz gant bezhin *Tonnerres de Brest*)

- Dañsit ...

Disadorn :

- Strolladoù entanet (rock, reggae, soul, funk, hengounel)
- JOZO* *(c'hoarioù olimpek)

Dizehan : C'hoarioù all, Smash bros war Game cube, kartoù dindan teltenn al lanfreed, Bukañtennañ versioù Plabenneg, c'hoarioù Breizh (paledoù ...)

Mikeal AR VAOD